

DONEZONOÙ DISPAR

# HOUPEZ HA DAÑVADEZED

Pemp bloaz zo eo krog Anaïs Langlais, 29 bloaz, hag Antoine Floury, 34 bloaz, da broduiñ houpez bio en ur menaj 25 hektar, e Brelidi. Evit talañ ouzh kleñvedoù ar plant-se o deus kemeret 70 dañvadez eus gouenn ar Gerveur. Gounezet o deus priz an endro er c'honkour « Donezonoù dispar ».

« Bet on oc'h ober ma studi war fiziologiezh ar plant hag ar genetik, tonket e oan da vont da enklasker neuze met n'eo ket ar pezh a felle din ober, a zispleg Antoine. Da-c'houde on bet liorzhour louzañour. » En ur gontañ ar gaoz gant daou vignon, an eil breser amatour hag egile sot gant ar plant, e oa graet e soñj gant Antoine produiñ houpez. Evit Anaïs, kelenner e oa e Sant-Ilan. Pa ne oa den ebet o produiñ houpez bio e Breizh tra ma oa klask war an danvez-se da vat e-mesk ar vreserien, e stagas ar c'houblad ganti e 2018. « Ar pezh a felle dimpeo en em staliañ lec'h m'hon defe darempredoù stank gant tud ar vro, eme Antoine. Buan-tre hon eus graet anaoudegezh gant ar vreserien e Breizh, en Aodoù-an-Arvor dreist-holl, ha kavet hon eus peizanted all da sikour ac'hanomp e Brelidi, ur marzh. »

Kreskiñ a ra an houpez evel an troell, tro-dro d'un neudenn (e gwiennoù koko) ruilhet en-dro da bester 6,50 metr uhelder dezhe, ha da orjalennoù stignet etre ar pester. « Stallet e vezont evel ur c'hastell kartoù, lakaet e vez ar pester hag an orjalennoù a-steud war al leur ha goude-se e ranker sevel anezhe evit sankañ anezhe evel zo dleet, a zispleg Anaïs. Evit ober se en doa goullet Antoine gant an holl labourerien-douar e-mesk hon amezeien, ha pa n'ana-vezemp den ebet. An deiz lakaet e oant aze - 17 traktor etre tout - ha gallet hon doa sevel an houpezen ur ober 48 eur. » Evit plantañ an houpez int bet sikouret gant studierien eus liseoù labour-douar Sant-Ilan, Peurid-ar-Roc'h ha Kernilien. « Anaïs ha me a vez ostourm evit ur mod da labourat an douar dorn-ha-dorn

## « PEIZANTED DORN-HA-DORN, UR MARZH »

gant doujañs evit an endro. Laouenbras omp o welet kement a dud o vont a-du gant ar pezh emamp oc'h ober », eme Antoine. En eskemm e tegemerront al liseidi bremañ da zont da welet o labour ha da gaozeal diwar e benn.

### « MA VEFE DA ADOBER E RAFEMP »

Troierezed bividik eo an houpez. En nevezamzer e komañs ar plant da greskiñ buan ken-ha-ken : 30 santimetr bemdez ! « E penn kentañ miz Mae e vezont etre 10 ha 15 santimetr hag e fin

● **PLUS D'INFOS**  
houblonbreton.com  
06 58 11 32 90

Anais hag Antoine asambles gant o dañvadezed dirak ar pester da harpañ an houpez, en nevezamzer, da sevel evel un droierez betek 6,50 m uhelder.

miz Even e savont betek 6,50 metr, a zispleg Antoine. A-benn miz Eost e taolfont bleunioù hag a vodastumet kenkent. » Da c'hortoz e vez d'an 70 dañvadez eus ar Gerveur a zo gante da c'hoari : « Debrin a reont tout an delioù izel, eme Anaïs, kuit d'ar c'hleñvedoù d'en em ledañ. » Ouzhpenn an houpez e ra an daou labourer-douar war-dro dañvadezed eus ar Gerveur, ar ouenn a zo en danjer brasañ e Breizh. « Naetaat a reont an houpezen en ur ober ur sizhun hag ar peurrest eus o amzer e vezont o peuriñ er pradeier, a lavar Anaïs. Bep bloaz e vez war-dro 120 a oaned digante. Gwerzhet e vezont bev - d'ar ouenn da stankaat - pe, goude bezañ lazhet anezhe pa vezont etre 10 ha 14 miz, dre lodennoù kig bio a vez kavet war-eeun erfeurm. »

Pa vez goullet gante ober ur bilañs eus ar pezh o deus graet e respontont a-unvouezh : « Start e oa bet kregiñ ganti, war-fet an arc'hant da gentañ-penn. E 2022 e oa bet produet 1 350 kg houpez ganimp e-plas 300 kg e 2021, gwelet a reomp ur bannac'h sklêrijenn dirazomp, ha klask zo war an danvez, ur bern. Ma vefe da adober e rafemp, sur ha neket marteze, gant an avantur-mañ hon eus desket kals war ar sikoura vez etre ar beizanted, an doujañs evit an endro hag ar mod da zalc'hen krog e-barzh. N'eo ket aezet cheñch penn d'ar vazh met pa zalc'her ganti e teuera-benn. » ●

Bernard Bossard



THERRY JEANDOT